

Ha penaos ober krampoez ?

Ker kent ha m'van di-me_ze_k Al.lon_la.di.ge
 -da al.lon_la Al.lon_la.di.ge don al.lon
 -la Ker kent ha m'oan di-me_ze_k en eur stad trist
 voen la_het Ho_mer En eur stad trist voen la
 -het

Kerkent ha m'oan dimezet,
En eur stad trist ' voen laket.

Laket ' voen e gwall enkrez,
N'em boa seurt em ziegez.

Paour glez ' oan n'e gwir n'em boa
Em zi, na skudell, na loa !

N'em boa na taol, na listri,
Na tamm ganto da zebri.

Da glask dour e voen kaset,
Gand eur podig pri torret ;

Gand eur podig pri torret
Hag eur c'hoz sailh mil douillet.

Va rozell ha va spanell
A oa c'hoaz er c'hoad a-bel.

Ha pa laken kig er pod,
Em boa eun askorn d'am led ;

Me 'n em gave, c'hoaz, ervat
O chom en ti d'her c'hriagnat.

Rak allies, 'vel ar c'hi,
E ven skarzel eus an ti !

Setu, tudou, ar vuhez
A renan em ziegez.